

Krampoer ar Minibruc.

Pe tra zo ne-ve ta Soazig En Boul vri ag pres-tig
Eur goud bras ma Iannig Gant Krampoer leiz ar bi lig

Petra zo neve ta Soazig
En Boulvriag prestig,
Eur goud bras ma Iannig
Gant krampoer leiz ar bi lig
Kavet vo krampoer gwinniz-du
War kolion ar c'holon?
Ia, ma lotr, ha re duu
Gret gant iod ha blend itru.
Debret e vo Krampoer gwinniz
-Vel man breman ar c'hiz?
Merc'hed koant ha distruiz
A werzo n'hoz ho c'hiz.
Evit glebian ar gorrailhen
Na vo kavet taken?
Bep seurt lez, gistr melen
Gargo skudet ha gweren.
Bean vo lez par, lez Kaoutet
Lez ribot, lez bevet?

Diouz ho c'hoant a vo gret
Gant lez neve gorset.
Na vo ket c'hoaz krampoer taret
Gant melen u livet?
Bean vo ma c'bredet
Re futet ha nacuet.
D'ar Veuré'hizien a nevo doan
Dibri krampoer d'ho c'hoan?
Krampoer kras, krampoer moan
Tano, sec'h, d'ar c'hoz dibean.
Pegement mar plij a gousto
Dont gant ar c'hoz goulo?
N'ho skouarn me hen taro
Pa vo lonket ar fritro.
Laret d'in c'hoaz, ma c'harante
Pegouls man ar gouel-ze?
Er zulvez d'abarde
Dat vo xonet ar c'hreiste.

Ret'vo dastum Kalz a bodow
Merc'hed ha piligou?
Bet dinec'h! an kolion
Vo goloet a veuziou.
Petec'h Kavet Krampoer ha lez
Da gement plac'big ker?
N'hon bro-ni, war ar mez
An kreou ze ve kavet aez.
Mont refomp hon daou d'ar Pardon
Evurus hon c'halon?
Deuz ganin da genson
Ar c'helou dre ar c'hanton.
En Boulvriag vo neventi
Eur voar lein a c'hoari?
Eur gouel Kaer, eun dudi
Deut dl hag ouz a pep ti.
N'ankoet ket en abaden
Zonj ouz hon goue'hemen?
Deut da glask eur grampoen
Gant Soazig, ar bleo melen.